



## Doushou Qi

Fichenn savet gant Sonia Orriger

### Pal ar c'hoari

Aloubiñ toull ar c'hoariet all gant unan eus e bezh

### Dafar

Ur bladenn c'hoari (da bellgargañ)


Gant 3 karrezad stign, ha 1 toull pep hini.

8 pezh da bep c'hoariet gant loened treset warno. (da bellgargañ)

Eus an hini kreñvañ d'an hini gwanañ.

- Un Olifant (O)
- Ul Leon (L)
- Un Tigr (T)
- Ur banterenn (P)
- Ur c'hi (Ki)
- Ur bleiz (B)
- Ur c'hazh (K)
- Ur razh (R)

- Un Olifant
- Ul Leon
- Un Tigr
- Ur banterenn
- Ur c'hi
- Ur bleiz
- Ur c'hazh
- Ur razh \*



### Mont en dro ar c'hoari

Ar c'hoarietien a lak e pezhioù evel eget ouzh an tresadenn.

Goude, pep hini d'e dro eo ret fiñval ur pezh.

### Penaos Fiñval

Ur c'harrezad nemetken bepred, war-raok, war-gil, en tu dehou en tu kleiz, met morse a dreuz.

### Penaos tapout pezh ar c'hoariet all

Gallout a ra ar c'hoarietien tapout pezhioù ar re all en ur gemer o flas, met nemet mard eo ken kreñv hag eñ, pe gwanoc'h egetañ.

Urzh :

### Nemedenn

- Ne c'hell ket ar c'hoarietien lakaat ur pezh war o c'harrezad toull, met gallout a reont mont war o c'harrezad stign digudenn.

- n'eus nemet ar razhed o deus ar gwir mont en dour.

- Al leoned hag an tigred o deus ar gwir lammat a-us d'an dour. (nemet m'emañ ur razh war o hent)

### Nemedenn evit kemer ur pezh.

Ar razh a c'hell tapout an olifant en ur vont e barzh e drompilh, war bouez pa'z a er maez eus an dour.

Ur pezh a zo war ar c'harrezadoù stign a c'hell bezañ tapet gant n'eus forzh peseurt loen.